

Mintier / an Autrou)

KANOUE

WAR VUÉ ANN OTRO 'R MINTIER

GRET

PA OÉ KASET HÉ RÉLÉGO DA LANDRÉGER

Koz ha iaouank, holl a pédañ
Da zonet da glevet kanañ
Bué ann Otro ar Mintier,
Gwéeh-all Eskop éñ Landréger.

Enn eiz war-n-ugend a gerzû,
Kénta hiritour da vîz-dû,
War douar Gwillom ha Briek
E c'hanaz hon tâd kalonek.

Er ger a Bariz hén gwélañ
Iaouañk iaouañg ô studiañ
War ar stad a velegiach,
Pébez gloar d'hé vugaléach !

Da driouac'h vla eunn doñsuren
Hén diskouez breur d'ar verzerien
Hag eunn abostol da Jézuz
Gand eur galon c'hloan ha nerzuz.

Da eiz vla war-n-ugend iyé
Ar pastor mâd-man a bigné
Eñ reng ar vrasa doktored
Euz ann déolojianed.

Tri bla ha tregond a gonté
Ann doctor-mañ enn hé vué ;
Nn otro Jirak neuz' hén galvaz
Evid béa hé yikel vrâz.

Enn drived blavez goudé-zé ,
'Nn hé galon tân ar garanté ,
Ec'h a gand hé vest , hé vignon
Da brézeg ar fé da Rozon.

Er zeitek kant par-urgent c'hoaz
E kréskaz mui évid biskoaz
Hé c'hloar hag hé c'halloudegez
Dré ma oa leun braz a furnez
Eskopti Tréger d'ar c'houlz-sé
D'hé fastor dom Iann a wélé ,
Dré ma tée'hé 'wid mond da Chartr ;
Né hallé pelloc'h béa zard.

Ann iliz glac'hared a béd ,
Kerkend hé féden zo klewet ,
Eur vouez d'ehi lar évid Tréger ;
Klask da bastor dom ar Mintier.

Dom Iann ta a gémer ann tée'h
Ha dom August a bign ouz kroéc'h ,
Chétu-hén eskob enn Tréger ;
Béc'h d'ar muzik ha d'ar c'hleier.

Er bla zeitek-kant par-urgent ,
'Rog 'oa peur-ed Ebrel enn hent ,
Enn iliz kaer ar Feuillanté
Eñ Pariz é oa eskobiet.

Béz' a oa ouz hén eskobia
Tri fastor ar ré zantella ,

Eskop Rozon , Chartr ha Sant-Paul ,
Gwir vignoned , Tréger ha Dol.

Brémañ , héb-mar , gant kalz a nerz
Hé holl brézegenno a gerz
Euz ann eil parouz enn ében
Ewid silvidigez ann dén.

Empâd eunnek vla mac'h eo béd ,
Ma breudeur holl , ha c'houi am c'hred ,
Hon fastor zantel ouz hon rén ,
Némed hon vâd né glaské kén.

Gand évez en deuz diwallet
Ouz ar bleidi hé holl zéñved ;
Gant hé gomzo éc'h int maget ,
Hag out-hañ stard int n'em staget.

Ewid prézek gwell komz Doué ,
Jéruz hon mest hag hon roué ,
E ra eur c'hatékiz nevé ,
Hén gwéled a rer c'hoaz hirié.

Ia , kaved é vé c'hoaz tud koz
Hag a lavarfé d'imp pénoz
Ec'h int béd gant-hañ kenteillet ,
Ha gant hon fastor koñfirmet.

Emañ bepred mer ma farouz ,
Ann Otro mâd Fransoa Kerrouz (1)
Hag en deuz joa vrâz ô véañ
Responted oferen d'ehañ.

Iliz Plæniel ha Langoad ,
Euz eur fé gréñv testéni mâd ,

(1) Marc'hek euz a Legion Hénor.

A zo béd gant-hañ binniget
'Rok m'en deuz ar vro kuitéet.

O bréman pénoz a riñ-mé
Da beur-gana 'vel ma téré
Obério ma fastor zantel ;
Hé vué a zo eur brézel.

Eñ kreiz ar mor mé 'wel al lést
Hag en em gann ouz ann tempest,
Kignadi 'ra ouz ar gérek ,
D'emp holl amzer drist ar brézek.

Goudè béa kémeret poan ,
Hon fastor dous evel eunn noan ,
Da genteilla hé vugalé ,
Ho c'huitéo holl hép dalé.

Sioaz , sioaz d'emp Bretoned ,
Pénoz n'em rei d'ar joausted ;
Etré ann holl eur goall vrézel
A ia enn hon bro da zével.

Bréman ma fastor a rénko
'Wid ar vâd en deuz gret d'hé vro
Lampad prim ével ar gédon ,
En em guz ével al laeron.

Dré-holl hép trué argaset ,
Hon éskop kér ha binniget ,
N'en deuz mui éñ Breiz da c'hortoz
Némed trubuillo dé ha noz.

Kant ha kant gwééh ec'h eo goasket
Gant eur bobl teodo milliget ,
Lakaat ra pédi éwit-hañ ,
Allaz enn eur goall stad éman.

A greiz holl bréman hén galver
Da vond prim dirag ar barner ;
Ar ger kerkent reñk da guitâd ,
Drouk braz zo laket war hé stâd.

Hon fastor kér erfad klasket
Gloan dirag ann holl 'zo kavet ,
Ha chétu hén er maez losket
'Vel eunn dén éñ-gaou tammalet.

Oaz a zé bréman d'ann hini
En deuz klasked en em venji
Euz eur pastor kén déréad ,
Goudé en dévo kalonad.

Dirak Chateled éc'h eo béd ,
Ha préstik , sioaz , mé a gréd ,
E vézo adaré galvet ;
Gwall aliez 'nem gav flatet.

Ha kouskoudé petra n'euz gret
Ma mañ ann diaoul ô redek ?
Ah ! hé holl amzer a drémen
O c'harz tud da gwéz' enn ifern.

Krok é oar holl d'hén hergui
'Barz er c'hastel-zé péhini
A répu bréman 'vel gwéchi all
Diskibien vrâz da zant Tual.

En kreiz ar mor mé wél 'al lést ,
Hag en em gann ouz ann tempest
Kigoadi 'ra ouz ar gérek ;
D'imp holl amzer drist a brézek

O pastor kér kén a vézo ,
Ma daou lagad mui n'ho kwelo

Ebarz traounien Breiz-Izel;
Eñ Bro-Zauz è reñfed mervel.

Chétu c'houi eñ tñ all d'ar mōn,
Evid-omp pébéz dishéhor,
Bugalé gér; bugalé vād
Goudé rei diañzao d'hon zād.

Allaz ma spéred né bad mui
Gand ann añken hag ann annui
O tond da daga ma c'halon
Dré m'am euz kollet ma mignon.

Inéo mād c'houi a irvoud;
Mez préstig ho pō ar galloud
Da véa gant-han c'hoaz joaiet
Rag eñ Jersé éc'h eo chomet.

Evid-omp-ni gwella kelo
C'hoaz é kléofomp euz hé gomzo,
Pa zo bago war ar rivier,
Hén gwélet c'hoas ni a espér.

Enn-tré C'hern hag er Rokejo
War zu Doué ni a zavo
Hon moézio leun a drugaré,
Dén na c'houvézo kément-sé.

Ar gérék d'emp a zervijo
Da virviken ével tésto
Euz ann añken hag ar glac'har
Hon euz war vor ha war zouar

Lezomp ar c'hañvo a gosté
Hag heuillomp brémañ adaré
Ar vué-mañ kén gloriuz
Hag ivé kén meulodiuz.

Landréger gant-hañ kuitaet
Da Zoué en deuz lavaret :

Evid ho kloar é labouriñ
Neuz fors pé vro en em gaviñ.

Kerkend é sao hé vision
Evid gloar hon rilijion
Ebarz enn énézen Jersé,
Kalz a inéo a c'honé.

D'Indan ann amzer é kuita :
Euz Jersé da Londrez éc'h a ;
Eno gand eunn nerz héb hé far
E c'honéo kalz c'hoaz héb mar.

Ober a ra klewet bemde
Gand eur voéz leun a garanté
Ebarz éñ bro ar Zauzoned
Komzo Jézuz a Nazaret.

Ar c'homzo-zé gant-hañ hadet
Freuz ar c'herra ho deuz douget,
Rag ar gateliked aboé
A ia war gréski er vro-zé.

Eñ kreiz hé vrasa labourio
Ar mignon-mañ d'ar vertuio
En em gay, soaz, gwall zammet
Gand ar gozni hag ar c'hléñved.

Bémde hé holl gamarado
Hén joausa enn hé boanio ;
Evel gand eunn diskuiz spéred
Hé gléñved hir en deuz douget.

Mervel a ra 'barz éñ Londrez (1)
Ar mignon-mañ d'ar zantelez ;

(1) 1801. — Noaget a 72 bloa.

Ann holl d'éhan ho deuz glac'har,
Londrez héc'h-unan hén lavar.

Kerkent d'ann éñv éc'h eo pignet
Eñ mésk ar zend, ar zentezed
Evid tañvaad ar gwir joajo;
Kén a vo d'hé holl drubuillo.

Eunn neubeudig amzer goudé
Dom David, hon fastor neve,
A ra digas hé rélégo
Euz a Londrez béteg hé vro.

Eur goél kaer kaer a oé préstet
Gand madelez ar Vretoned,
Ma c'haljent mui ho énor
Kend évid dond d'ho eñteri,

Enn hé hénor gand ar varzed
Rak-tâl ivé é oé kanet
Gwerzio kaer ha meulodiu
Hag holl hén galvjont évuruz.

Enn iliz vrâz oé éñteret
Hé gorf santel gand péb résped
Da c'hortoz ann dé ma sono
E barz enn aér ann trompillo.

Ma teu dén-a-bet da c'houlén
Piou a zo d'ar woerz man perc'hen,
A greiz kalon holl lavarét
Ec'h eo Iann ar Minous galvet.

Propriété de Jean le Minoux, chansonnier
(1) à Pleumeur-Gautier.